

PENAO S TENNAÑ AN DAOULAGAD RUZ

Gant Belvar

Live : Aes


Handelv : 2.6

Lañvaz : GNU/GPL


*Demat deoc'h ! Deskiñ a rin deoc'h en tuto-mañ penaos ober evit lemel ar ruz kasaus a vez lakaet gant ar benveg foto a-wechoù.*

Da gentañ-penn, digorit gant GIMP ar poltred o peus c'hoant gwellaat en ur ober Restr -> Digeriñ...


Setu neuze ar skeudenn digoret :




Zoumit goude-se war an daoulagad dre ar benveg zoom , pe oc'h ober Skrammañ -> Zoom hag o tibab ar zoom a gлот. Tu zo deoc'h fiñval goude gant ar benveg dilec'hiañ




Kemerit goude-se ar Benveg Diuzañ Elipsenn




Ret e vo deoc'h neuze diuzañ lodenn ruz an daoulagad.  
Krogit gant ul lagad, kelc'hiit ar zonenn e ruz evel-se :




Grit an eil lagad goude-se, o pouezañ war an touchenn shift (ar bir a-us da Ctrl) ha diuzit ar zonenn ruz :




Setu an daoulagad diuzet :



Cheñchit neuze al lintr oc'h ober Livioù -> Lintr-Dargemm...




Bez o peus neuze ar prenestr-se :







Diskennit neuze al lintr a-benn duañ an daoulagad :




Ma n'eo ket trawalc'h diskennit c'hoazh muioc'h :



Argasit an diuzad oc'h ober Shift+Ctrl+A pe evel-se :



Tu zo deoc'h neuze sellet an disoc'h o tennañ ar zoom :



Setu ! Noc'h ket mui chalet gant al liv kasaus-se ! Ken ar wech all !

Belvar

<glasbarg A\_LOSTEK gmail PIK com>

09/02/2010

*Trug' da Clémentine (3 bloaz)*

Geriaoueg :

lintr, g, lintroù : luminosité

dargemm, g, dargemmoù : contraste